



# Mé-lamp holl

Harmonisation : Henri-Pierre Ruello



Mé-lamp holl, lan a joé ma-de - léh en Eu-tru Doué! Mé-lamp



holl, lan a joé, ma - de - léh en Eu - tru Doué!



1 : Ge - nemp, Ac - led san - tél, Mé - let é ga - rañ - té Ge -  
2 : Pé tad en dès ja - més Get ké - ment a dru - é Sel -  
3 : Bu - gul mat ha ti - nér, Ri - dek e ra - a - benn de






nemp d'é lar - gañ - té, ka - net gloér peur - ba - dél!  
let é vu - ga - lé Ha dis - tan - et o gloéz?  
glask é za - va - denn, d'hé zen - nein a zañ - jér.

**Digoradur :**


*Dign eo, an Oan a zo bet lidaberzhet,  
da resev galloud, doueelezh,,  
furnez, nerzh hag enor.  
Dezhañ, gloar ha galloud.  
er c'hantvedoù didermen.*

**E anv an Tad,  
hag ar Mab,  
hag ar Spered Santel :  
Amen !**

**Ar beleg :**



**Ar bobl :**



### Lid ar binijenn :

Ma breudeur, anzavomp hor pec'hedoù dirak Doue, ha goulennomp e bardon, aveit ma vezimp e stad da lidiñ an oferenn santel.

#### **Kyrie' :**

Rém

Solm

Hwi hag e zi - samm - er ha -  
Hwi hag e zo dait de hal -  
Hwi a - zé - et é gloér

Dom

Solm

lon - eù gwas - ket d'er péh - ed : Eu - tru  
veiñ er bé - c'he - rion : Eu - tru  
en Tad 'eit gou - lenn é bar - don : Eu - tru

Rém

Solm

Doué, ho peet tru - é.  
Krist, ho peet tru - é.  
Doué, ho peet tru - é.

*Plijet get Doue hollgelloudek kemer truez doc'homp,  
pardoniñ deomp hor pec'hedoù  
hag hor c'has d'ar vuhez beurbadus.*

*Ar bobl : Amen !*

*Deit da vout glan dre ar gwad  
 en deus strewet Jezuz-Krist àr ar groaz,  
 gellout a reomp bremañ kaniñ hor meuleudi da Zoue,  
 En trugarekaat aveit e bardon hag ar garantez en deus  
 gouarnet aveidomp en despet d'hon displealded.*

**Gloria :**

Glo - ri - a! Glo - ri - a! In ex - cel - sis De -

o, Glo - ri - a! Glo - ri - a! In - ex - cel - sis De - o. -

10 Peac'h àr en douar, d'en dud karet ge - toñ,  
 Eutru, Mab unganet, Salver Jezuz, Eutru ha Doué, Mab en Tad,  
 Rak C'hwi hempkén e zo san - tel.

11:

Ho meuliñ e ramp, ho trugérékaat e ramp, hos ado - riñ e ramp.  
 C'hwi hag e lam pec'hed er bed, ho pet tru - é doc'h emp,  
 C'hwi hempkén e zo Mestr.

12:

Inour deoc'h e ganamp, ha mil bennozh aveit ho kloér hemp par.  
 C'hwi hag e lam pec'hed er bed, degemeret hur pe denn.  
 C'hwi hempkén e zo ihuel-meurbet, Sal ver Je zuz.


13:

Eutru Doué, Roué en néaiv, Doué en Tad holl - gel - lou - dek.  
 C'hwi hag e zo azeet en tu deheù d'en Tad, ho pet tru - é doc'h emp.  
 Get er Spered Santel, e gloer Doué hun Tad. A - men !

Kempedenn :


*Pedomp,  
Doue peurbadus,  
Mennet hoc'h eus diazeziñ pep tra en ho Mab karet,  
Roue an Hollved ;  
Grit mac'h anavezo razh ar grouadelezh,  
dieubet ag ar sklavelezh,  
ho kalloudegezh  
ha ra gano ho meuleudi dizehan.*

Lam




Dre hor Salver Jezuz-Krist,

2 Lam Mim



ho Mab hag hon Ao trou,

3 Lam




a vev hag a ren, Doue geneoc'h

4 Lam Mim FaM



ha get ar Spe - red San - tel,

5 RéM Mim Lam Mim Lam



a-holl-vis - koazh da virvi - ken : A - men !

# Lennadenn gentañ

Lennadenn tennet a levr Ezekiel

Evel-mañ e komz an Aotrou Doue :

Setu me ma-unan !

Gober a rin-me ma-unan en-dro d'am deñved

hag o gouarn a rin.

Evel ma evesha ar bugul e zeñved

d'an deiz ma en em gav e-kreiz e zeñved bet didolpet ;

evel-se e eveshin man deñved

hag e tenniñ anezhe ag an holl lec'hioù

ma oant bet strewet enne

en deiz ar c'houmoul hag an amzer teñval.

Me eo an hini a vaesay men deñved,

me an hini o lakay da ziskuizhiñ,

diougan an Aotrou !

An hini kollet a glaskin,

an hini a vanke a zegasin en-dro,

an hini gloazet a lienñ he gouli ;

an hini glañv a gennerzhin,

an hini druz ha kreñv a ziwallin ;

o maesaat a rin get reizhted.

Evit ar pezh a sell doc'hoc'h, ma deñved,

evel-mañ e komz an Aotrou Doue :

Setu ma yan da varn etre dañvad ha dañvad,

etre maouted ha bouc'hed.

Setu komz an Aotrou Doue : **Bennozh da Zoue !**

# Psalm 22

## Diskan :

En Eutru é me fas - tor, ha nitra ne vank din - mé.

## Pozieù :

Me fastor é en Eutru,  
 Me c'has e ra d'en dourieù dichuéhus,  
 Ha pe gerhin dré stankenn er marù,  
 A - veidon ec'h aozet ur preud  
 Ma - deléh ha gras e gerho genin

n'ès tra erbet hag e vank din ;  
 de advi - ùaat me i - néañv  
 N'hum bo eun rak droug erbet, C'hwi em c'hi - chen.  
 a-dal d'em i - né - mi - zed ;  
 A-hed dé - ieù men bu - hé ;

àr bradeiér léton glas  
 Me c'hondu e ra dré henteù er reihdér  
 Gét hou pah hag hou kammell  
 àr me fenn é chuilhet hou c'hweh-vat,  
 Me demeurañs e vou ti en Eutru

Me laka de c'hour - vé.  
 Aweit i - nour é anù.  
 e-laka dinec'h me i - néañv.  
 me c'halis 'zou lan - barr.  
 A-hed en holl am - zér.



# Eil lennadenn

Pennad tennet a lizher kentañ an Abostol Paol d'ar Gorintiz

Ma breuder,  
bremañ, setu ar wirionez : Met n'eo ket se !  
Ar C'hrist evit gwir a zo dihunet da vev a-douezh ar re varv,  
an hini kentañ ag ar re gousket.  
Rak get un den emañ daet ar marv,  
ha get un den e tay adsavedigezh ar re varv.

Evel ma varv an holl en Adam,  
evel-se ivez ec'h adkavo an holl ar vuhez er C'hrist.  
Met pep hini en e renk e penn an holl, ar C'hrist evel kentañ ;  
àr e lerc'h ar re a vo d'ar C'hrist d'an deiz ma tay en-dro.

Goude-se e vo ar fin,  
pa lakay e rouanteleh etre daouarn Doue an Tad,  
goude bout distrujet pep Priñselezh, Mestroniezh ha Galloudegezh.  
Rak dleet eo dezhañ ren,  
betek m'en devo lakaet e holl eneberion dindan e dreid.  
Hag an diwezhañ enebour a vo diskaret a vo ar Marv.

Rak goude ma vo bet lakaet pep tra dindanañ,  
neuze ar Mab e-unan  
en em lakay dindan an hini en devo lakaet pep tra da sujiñ dezhañ,  
evit ma vo Doue pep tra e kement tra 'zo.

Setu komz an Aotrou Doue : **Bennozh da Zoue !**

# Alleluia, Sklaerder ar Broadoù

Al-le-lu ia! Sklaer-der er Bro-a-deù! Al-le-lu-ia! Al-le-lu-


ia! Al-le-lu-ia! Jé-zuz-Krist, é you-c'hamp! - Al-le-lu-ia! Al-le-lu-ia! -

10  
Benniget, en Hani e zeuy é anù en Eu-tru Doué, Benniget réna - dur e zeuy, Ka -

12  
ni Da-vid hun Tad.


# Deroù an Aviel

Mim Lam Mim




An Ao - trou Doue gen - oc'h :

2 Lam Mim



Ha get ho spe - red !

3 Mim Lam Mim



Len - na - denn ag an A - vi - el san - tel -

5 Sim Mim



her - vez sant Ma - zhev.

6 Mim Lam Mim Sim Mim



Gloar deoc'h-C'hwi, ô Ao - trou Krist !

En amzer-hont, Jezuz a gomze d'e zisipleg ag e zistro :  
«Pa zay Mab an Den en e c'hloar hag e holl Aeled getañ,  
neuze e azezo àr e dron a c'hloar,  
hag e vo tolpet an holl pobloù diraktañ,  
hag e tispartio an eil doc'h egile,  
'vel ma tisparti ar mesaour an deñved doc'h ar bouc'hed.  
Hag e lakay an deñved en tu dehoù dezhañ  
hag ar bouc'hed en tu kleiz.

Neuze e lâro ar Roue d'ar re a vo en tu dehoù dezhañ :  
«Dait, c'hwi ar re benniget get ma Zad, da viaouiñ ho heritaj,  
ar Rouantelezh a zo bet aprestet evideoc'h  
abaoe krouidigezh ar bed.  
Rak naon am eus bet, ha roet ho peus din da zebriñ,  
sec'hed am eus bet, ha roet ho peus din da evet ;  
estrañjour e oan, ha man degemeret ho peus ;  
en noazh e oan, ha c'hwi ho peus man gwisket ;  
klañv ha daet oc'h d'am gwelet ;  
er prizon ha daet oc'h davedon.

An dud just a responto dezhañ neuze :  
Aotrou, pegoulz hon eus-ni ho kwelet é kaout naon,  
ha roet deoc'h da zebriñ ? Kaout sec'hed ha roet deoc'h da eviñ ?  
Pegoulz hon eus ho kwelet estrañjour hag ho tegemeret ?  
En noazh hag ho kwisket ?  
Pegoulz hon eus ho kwelet klañv pe er prizon hag ho pizitet ?  
Hag e responto ar Roue dezhe :  
E gwirionez, m'el lâr deoc'h,  
dre ma ho peus graet kement-se da unan ag ar re vihanañ a mam  
breuder, ho peus er graet din-me ma-unan.

Neuze ivez e lâro d'ar re a vo a gleiz dezhañ :  
Pellait a-zoc'hon, tud milliget,  
kit d'an tan peurbadus a zo bet aozet evit an Diaoul hag e Aeled.

Rak naon am eus bet, ha n'ho peus roet netra din da zebriñ,  
 sec'hed am eus bet, ha n'ho peus ket roet din da eviñ,  
 estrañjour e oan, ha n'ho peus ket man degemeret ;  
 en noazh, ha n'ho peus ket man gwisket ;  
 klañv hag er prizon, ha n'ho peus ket mam bizitet.

Neuze, int ivez a lâro dezhañ :

Aotrou, pegoulz hon eus-ni ho kwelet é kaout naon pe sec'hed ?  
 bout estrañjour, pe en noazh, pe klañv, pe er prizon ha n'hon eus  
 ket ho sikouret ? Hag e responto dezhe :

E gwirionez m'el lâr deoc'h,

pa n'ho peus ket graet kement-se da unan ag ar re vihanañ-se,  
 n'ho peus ket er graet din-me ma-unan.

Ha monet a ray ar re-mañ d'ar c'hastiz peurbadus,  
 hag ar re just d'ar vuhez peurbadus.»

Mim Sim Mim

Se - tu komz an Ao - trou :

Mim Lam Mim Sim Mim

Meu - leu - di deoc'h, ô Ao - trou Krist !

## Kredo :

Me 'gred e Doue, an Tad hollgelloudek,  
Kroueour an neañv hag an douar,  
hag e Jezuz-Krist, e Vab unganet, hon Aotrou,  
a zo bet koñsevet dre nerzh ar Spered Santel,  
ganet ag ar Werc'hez Vari,  
en deus gouzañvet dindan Poñs Pilat,  
a zo bet staget doc'h ar groaz,  
marvet ha bet lakaet er bez,  
diskennet d'an ifernioù,  
deuet a varv da vev an drivet deiz,  
pignet d'an neañv, hag azezet en tu dehoù an Tad,  
a-eno e teuy da varn ar re vev hag ar re varv.  
Me 'gred er Spered Santel,  
en Iliz santel katolik,  
e kumunded ar Sent,  
e pardon ar pec'hedoù,  
e adsav ar re varv,  
er vuhez beurbadus. Amen !

## Bedenn hollvedel

Ar beleg :

Bugale karet get an Aotrou Doue,  
krediñ a reomp goulenn e garantez.  
A-greiz kalon,  
kinnigomp dezhoñ holl ar re unanet genomp dre ar bedenn.

Diskan : **Aotrou hon Doue, ô Tad Santel, selaouit hor pedenn !**

Dibenn :

Diskouezit c'hoazh deomp, Doue an Tad, ar garantez hoc'h eus  
en hor c'heñver. Ha deuit da sikour holl ho pugale er poanioù  
ar vuhez. Ni er goulenn genoc'h dre Jezuz-Krist, hor Salver.

Ar bobl : **Amen !**

## Lid ar Profoù

### Kinnig ar bara

Ar beleg :

*Ra vezit benniget, Aotrou Doue, Kroueour ar bed a-bezh, rak en ho largentez e roit deomp ar bara-mañ a ginnigomp deoc'h, frouezh an douar ha frouezh labour mab-den ; dont a ray da vout aveidomp bara ar vuhez.*

Ar bobl :

**Bennozh da Zoue ha meuleudi a-holl-viskoazh da virviken !**

### Kinnig ar gwin :

Ar beleg :

*Dre vister (gevrin) an dour-mañ lakaet er gwin, ra vimp lodek e natur doueel an Hani en deus prezet kemer hon natur denel. Ra vezit benniget, Aotrou Doue, Kroueour ar bed a-bezh, rak en ho largentez e roit deomp ar gwin-mañ a ginnigomp deoc'h, frouezh ar winienn ha frouez labour mab-den ; dont a ray da vout aveidomp ur vammenn a vuhez.*

Ar bobl :

**Bennozh da Zoue ha meuleudi a-holl-viskoazh da virviken !**

A vouezh izel :

*Get ur galon izel ha glac'haret e c'houlennomp genoc'h, Aotrou Doue, hon degemer. Lakit hor sakrifis (aberzh) da sevel betek ennoc'h hiziv, ha grit ma plijo deoc'h.*

### Lababo :

*Gwalc'hit-me, ô ma Doue, a bep kousiadur ha glanait-me a ma fec'hed.*

### Oratre fratres :

ar-beleg : *Pedit, mam breudeur, ma plijo get Doue an Tad holl-gelloudek degemer ma sakrifis a zo ivez ho hani-c'hwi :*

Ar bobl :

**Plijet get Doue en degemer ag ho taouarn,  
aveit e c'hloar hag e veuleudi,  
aveit hor mad-ni hag hani an Iliz.**

## Kempedenn àr ar profoù :

*O kinnig an aberzh hag a adunvan deoc'h an dud,*

*Aotrou, Doue, ho pedomp :*

*ra roio ho Mab da razh ar bobladoù*

*madoù an unander hag ar peoc'h.*



dre Je - zuz - Krist, hor Sal - ver : A - - men !

### **Prefas :**



Rém Solm Rém Rém Lam Rém

An Ao - trou Doue gen-oc'h : Ha get . ho spe red !



Solm Lam Rém Solm Lam Rém Lam

Hor c'ha-lon d'an u - hel : E-mañ troet tre - ma Doue !



Rém Lam Rém

Tru - ga - re-kaomp hon Ao-trou Doue ! Just ha san - tel eo !



*E gwirionez, just ha santel eo,  
 ha talvoudus aveidomp ho trugarekaat  
 e pep lec'h hag e pep amzer,  
 C'hwi, Tad santel-meurbet, Doue peurbadel hag hollgelloudek.  
 Gouestlet ho peus, Beleg peurbadel ha Roue an hollved,  
 ho Mab unel, Jezuz-Krist, hon Aotrou,  
 a-benn dezhañ d'en em aberzhiñ en e unan  
 àr aoter ar Groaz e gouzañver glan ha peoc'hiek,  
 aveit kas da benn kevrinoù hor salvedigezh,  
 ha goude bout laket dindan e gelloud pep krouadur,  
 e lakay etre daouarn ho kelloud hep par  
 ur renadur divent ha dizehan :  
 renadur a vuhez hag a wirionez,  
 renadur a c'hras hag a santelezh,  
 renadur a reizhder, a garantez hag a beoc'h.  
 Rak-se, get an Aeled hag an holl sent, e vrudomp brasted ho kloar  
 en ur ganiñ, holl a unvouezh :*

Solm Ré Solm Ré  
 San-tel ! San-tel ! San-tel ! En Eu - tru-Doué, Mestr en Né hag en  
 5 Solm  
 douar !  
 6 Solm Dom Solm FaM Solm  
 Lan é get hou kloér en né hag en douar !  
 9 Dom Ré Solm  
 Ho - san - na é lein en né ! Re  
 11 Solm Ré Solm Ré Solm  
 vou ben - ni - get en Ha-ni ez a é anù en Eu - tru-Doué !  
 15 Dom Ré Solm  
 Ho - san - na é lein en né !

### Pedenn veur III :

Ya, santel oc'h e gwirionez, Aotrou Doue,  
ha C'hwi eo mammenn pep santelezh.  
Setu-ni tolpet dirazoc'h, hag a-unan get an iliz a-bezh,  
d'an deiz kentañ-mañ ag ar sizhun,  
e lidomp an deiz-mañ deiz adsavet ar C'hrist a-douezh ar re varv.  
Drezañ, hag ho peus savet a-zehoù deoc'h,  
Doue hon Tad, ni ho ped :

Plijet genoc'h enta santelaat get gluizhenn ho Spered Glan  
ar profoù-mañ kinniget deoc'h, ma teuint da vout aveidomp (†)  
Korf ha Gwad hor Salver Jezuz-Krist.

P'en em roas Jezuz d'e Basion anezhañ e-unan,  
e kemeras bara hag, en ur rantiñ trugarez,  
er rannas hag er roas d'e zisibled en ul lâret :

**Kemerit ha debrit holl anezhañ  
rak kement-mañ zo ma c'horf a vo roet aveidoc'h.**

Avel-se c'hoazh goude koan, e kemeras ivez ar c'halisad hag,  
en ur rantiñ arre trugarez, e roas d'e zisibled en ul lâret :

**Kemerit hag evit holl anezhañ,  
rak kement-mañ zo kalisad ma Gwad,  
Gwad an emglev nevez ha peurbadus  
a vo skuilhet aveidoc'h hag aveit e-leizh a dud da lemel  
ar pec'hedoù.  
Grit kement-mañ aveit ober eñvor ac'hanon.**

*Ar beleg : Bras eo mister ar feiz !*

# Gorreoù

Amazing grace

SolM



Gloer doc'h - C'hwi marù àr er groez ! Gloer doc'h -

4 DoM SolM RéM SolM



C'hwi, Je - zuz ! Ad-sa - ùet lan a vu - he, hur Sal -

8 RéM SolM Mim



ver ! Hag hun Doue ! C'hwi 'zey en - dro, Splann-der -

12 DoM SolM RéM SolM RéM SolM



lu - ger - nus ! Che-tu - ni àr-saù doc'h ho kor - toz !

O terc'hel soñj enta a varv Jezuz hor Salver hag e adsav ag ar bez,  
e kinnigomp deoc'h, Tad Santel,  
bara ar vuhez ha kalisad ar salvidigezh,  
en ul lâret deoc'h trugarez aveit ar c'hras a rit deomp  
d'en em zerc'hel amañ dirazoc'h ha d'ho servijiñ.

A galon izel ho pedomp :

Pa gemerimp perzh e korf ha gwad hor Salver,  
Ra vimp da vout unanet etrezomp, dre ar Spered Santel.

Ho pet soñj, Aotrou Doue ag ho iliz strewet dre ar bed a-bezh ;  
Grit dezhi kreskiñ er garantez,  
a-unan get hor Pab Frañsez,  
hag hon Eskob Raimond,  
ha get kement hini a zo e karg ag ho pobl.

Ho pet soñj c'hoazh

ag hor breudeur a zo marv get an esperañs  
da sevel a varv da vev ;  
hag ag an holl dud tremenet en ho trugarez :  
o degemerit da welet ho splannder.

Plijet genoc'h kemer truez doc'homp-holl,  
ma c'hellimp hor bout perzh er vuhez beurbadus,  
get ar Werc'hez glorius Vari, Mamm da Zoue,  
get Sant Jojob he fried,  
get an Abostoled eürus,  
hag an holl Sent a bep amzer o deus plijet deoc'h,  
ma c'hellimp ivez kaniñ deoc'h gloar ha meuleudi  
dre ho Mab Jezuz-Krist.

**Doxologie :**

DoM Lam Rém SolM DoM  
Dre ho Mab, getoñ hag en - noñ : A - men !

Lam Mim FaM Rém SolM  
Deoc'h-Chwi, Doue an Tad holl-gelloudek, a-unan get ar Spered San - tel : A - men !

DoM FaM SolM Lam Rém DoM  
Pep gloar ha pep i - nour a holl vis - koazh da virvi - ken : - A - men !

***Hon Tad :****El m'hon eus desket get hor Salver**ha hervez e c'hourc'hemenn, e kredomp lâret :**Hon Tad hag a zo en neañ, hoc'h anv ra vo santelaet,**Ho rouantelezh degaset deomp,**Ho vennantez ra vo graet àr an douar 'vel an neañ.**Roit deomp hiriv hor bara pemdeziek,**Pardonit deomp hor pec'hedoù,**'vel ma pardonomp d'ar re o deus pec'hed doc'homp,**Ha n'hon laosket ket da gouezh en tantasion**Met hon diwallit doc'h an droug.**Plijet genoc'h, Aotrou Doue,**pellaat an douk azohomp,**Ha reiñ deomp ar peoc'h er bed-mañ.**Aveit ma vimp, dre sekour ho madelezh,**distag bepred doc'h ar pec'hed,**ha gwarantit doc'h pep trubuilh,**ni hag a c'hortoz eürusted ar baradoz**ha distro hor Salver Jezuz-Krist.*

Ar bobl : **Rak deoc'h-C'hwi, Aotrou Doue,**  
**emañ ar Rouantelezh hag ar gloar**  
**a-holl-viskoazh da virviken. Amen.**

## Lid ar peoc'h :

Salver Jezuz-Krist, C'hwi ag hoc'h eus lâret d'ho Apostoled :  
« Ar peoc'h a leskan genoc'h, ma feoc'h a roan deoc'h »  
na sellit ket doc'h hor pec'hedoù, met doc'h feiz ho iliz ;  
Plijet genoc'h, hervez ho volantez,  
reiñ dezhi ar peoc'h hag e unaniñ,  
C'hwi hag a vev hag a ren a-holl-viskoazh da virviken. Amen !

Mim RéM Mim

Peoc'h hor Salver a vo be - pred ge - neoc'h :

Lam Sim Mim Sim Mim

Ha get ho Spe - red !

Detailed description: This block contains the first two staves of musical notation for the hymn 'Lid ar peoc'h'. The first staff is in treble clef with a key signature of one sharp (F#) and a common time signature. It features three notes: a whole note on G4 (labeled 'Mim'), a quarter note on B4 (labeled 'RéM'), and a quarter note on G4 (labeled 'Mim'). The lyrics 'Peoc'h hor Salver a vo be - pred ge - neoc'h :' are written below the staff. The second staff is also in treble clef with a key signature of one sharp (F#) and a common time signature. It features five notes: a quarter note on G4 (labeled 'Lam'), an eighth note on F#4 (labeled 'Sim'), a quarter note on G4 (labeled 'Mim'), a quarter note on A4 (labeled 'Sim'), and a quarter note on G4 (labeled 'Mim'). The lyrics 'Ha get ho Spe - red !' are written below the staff.

## Oan Doue :

Korf ha Gwad hor Salver Jezuz-Krist, kejet amañ,  
da reiñdeomp, dre ar gomunion, ar vuhez beurbadus.

Rém Solm Rém Solm Dom Rém Solm

Oan Doue a lamm pe - c'he - doù ar bed :

1.2. Solm Rém Solm

Ho peet tru - ez doc'h - omp.

3. Solm Rém Solm

Roit deomp ar peoc'h.

Detailed description: This block contains three staves of musical notation for the hymn 'Oan Doue'. The first staff is in treble clef with a key signature of two flats (Bb, Eb) and a 6/8 time signature. It features six notes: a quarter note on G3 (labeled 'Rém'), a quarter note on Bb3 (labeled 'Solm'), a quarter note on G3 (labeled 'Rém'), a quarter note on Bb3 (labeled 'Solm'), a quarter note on D4 (labeled 'Dom'), and a quarter note on G3 (labeled 'Rém'). The lyrics 'Oan Doue a lamm pe - c'he - doù ar bed :' are written below the staff. The second staff is in treble clef with a key signature of two flats (Bb, Eb) and a 4/4 time signature. It features three notes: a quarter note on G3 (labeled 'Solm'), a quarter note on Bb3 (labeled 'Rém'), and a quarter note on G3 (labeled 'Solm'). The lyrics 'Ho peet tru - ez doc'h - omp.' are written below the staff. The third staff is in treble clef with a key signature of two flats (Bb, Eb) and a 6/8 time signature. It features four notes: a quarter note on G3 (labeled 'Solm'), a quarter note on Bb3 (labeled 'Rém'), a quarter note on G3 (labeled 'Solm'), and a quarter note on G3 (labeled 'Solm'). The lyrics 'Roit deomp ar peoc'h.' are written below the staff.

Pedenn a-raok ar gomunion :

*Salver Jezuz-Krist, Mab an Doue bev,  
C'hwi zo deuet hervez volantez ho Tad  
ha get nerzh ar Spered Santel,  
da reiñ dre ho marv ar vuhez d'ar bed ;*

*Plijet genoc'h, dre ho Korf hag ho Kwad sakret,  
ma glanaat a ma holl fallantez  
ha ma gouarn doc'h an drouk ;  
Grit ma talc'hin a -greiz ma c'halon d'ho kourc'hemennoù  
ha n'em leskit birviken d'en em zisparti azoc'hoc'h.*

*Salver Jezuz-Krist, paz an da resev  
ho Korf hag ho Kwad santel,  
na sellit ket doc'h ma fec'hedoù,  
met kentoc'h, dre ho madelezh,  
grit ma talvo ar gomunion-mañ,  
d'en em difenn korf hag ene,  
ha da reiñ din salvidigezh.*

*Eürus ar re a zo galvet da bred santel hor Salver.  
Setu Oan Doue, an Hini a lam pec'hedoù ar bed :*

Ar beleg : Eürus ar re a zo galvet da bred santel an Oan.

Setu Oan Doue, an hini a lamm pec'hed ar bed :

**R/ : Man Doue, ned on ket dign ma teet davedon,  
met lârit ur ger hepken hag e vo aesaet din.**

*Korf hor Salver d'em gouarn aveit ar Vuhez beurbadus.  
Gwad hor Salver d'em gouarn aveit ar Vuhez beurbadus.*

Kempedenn ar gomunion :

*Roue eo an Aotrou, ren a ra er beurbadelezh ;  
Reiñ a ra an Aotrou d'e bobl  
bennozh ar peoc'h.*

# Mé é er bara a vuhé

Mim Lam Mim

Mé é'r ba - ra dait ag en né,  
 C'hwi holl e zou chueh ha sam - met,  
 Dait, c'hwi e glask er wi - rio - né,  
 Me chom me c'hom - zeù biù en - noc'h,  
 'El m'en dès en Tad me c'ha - ret,

4 Sim Lam Mim Sim

Neb e gred en - non 'dès er vu - hé. -  
 Dait ha mé 'rei doc'h nerh ha ka - lon.  
 Me c'hom - zeù zou spe - red ha bu - hé.  
 Gou - len - net get fé, reit é vou doc'h.  
 'El - sé eù - é em ès hou ka - ret.

## Diskan :

7 Mim Lam Sim Mim

Ka - ret hou preu - dér hag é vin ge - noc'h !



## Pedenn àr-lec'h ar gomunion :

*Goude bout lodennet bara an divarvelezh,  
hoc'h aspedomp, Aotrou :*

*hor gloar a lakomp da sentiñ d'ar C'hrist, Roue an hollved,  
grit ma c'hellimp beviñ getoñ, da viken,  
e demeurañs en neañv.*

Lam Mim Lam Mim Lam

Dre Je - zuz - Krist, hor Sal - ver : A - men !

### **Kloziñ an oferenn :**

Rém SolM Rém SolM Rém Lam Rém

An Ao - trou Doue ge - neoc'h : Ha get ho Spe - red !

Rém

Doue holl-gelloudek d'ho pennigiñ : an Tad, ar Mab,

Lam Rém Mim Lam

hag ar Spe - red Sañ - tel : A - men !

Lam Mim Lam Rém Lam Mim Lam

Ker - zhit e peoc'h hor Sal - ver : Ben - nozh da Zoue !

# Avel hon Tadoù



A - vèl hun · ta - deù,                    ni vou tud a  
 Doué e vou ber - ped                    Mestr àr bep tié -  
 En hun tié - gé - hieù,                    sel - let vou 'èl



fé !                    Doué e vou ber - ped                    hur Mestr hag hur  
 geh :                    Ti - ér Ar - vo - riz                    vou é ran - te -  
 Roué                    get en tad, er vamm                    hag er vu - ga -



Roué !                    Doué e vou ber - ped                    hur Mestr hag hur  
 léh !                    Ti - ér Ar - vo - riz                    vou é ran - te -  
 lé,                    get en tad, er vamm                    hag er vu - ga -



Roué !  
 léh !  
 lé.